

LIZHTORIG

2013-2014 niverenn 1

Devezh kentañ ar 6vet er skolaj
La rentrée des sixièmes



Ar re 6vet A en o sal-glas



Ar re 6vet B en o sal-glas

An 3de klas en Oriant

Les troisièmes à Lorient



Mirdi listri-spluj Keroman

D'ar Meurzh 15 a viz Here eo bet ar re 3de en Oriant e-pad an devezh. Diouzh ar mintin int bet degemeret e mirdi listri-spluj Keroman evit ur weladenn istor. Tro 'zo bet da gomz gant an henter a-zivout istor al listri-spluj hag an emgannoù-mor en eil brezel bed, e Breizh.

Forum ar Micherioù

Goude merenn o deus bet tro da vont da Forum ar Micherioù e palez ar c'hendalc'hioù, e kreiz-kêr an Oriant. Tro o deus bet da eskemm gant tud a-vicher a-bep seurt : ar c'heginerezh, an arme, ar morlu, micherioù ar mor, micherioù an deskadurezh, micherioù ijinouriezh hag all evit kregiñ da brederiañ en o dazont-micher.

Keroman

Ce mardi 15 octobre les élèves de 3ème ont passé une journée à Lorient. Ils ont été accueillis en matinée à la base sous-marine de Keroman pour une visite historique. Ils ont pu échanger avec le guide sur la rôle de cette base durant le 2nde guerre mondiale et comprendre ainsi les faits de guerre et bataille marine de cette période en Bretagne.

Forum des métiers

L'après-midi s'est poursuivi au Forum des métiers au Palais des Congrès de Lorient. Lors de cette visite, ils ont rencontré des professionnels de différents horizons : cuisine, armée, marine, métiers de la mer, éducation, ingénierie et bien d'autres, afin de commencer à réfléchir sur leur avenir professionnel.



Sinema e brezhoneg, e saozneg, eskemm gant Okitania...

Cinéma en breton, en anglais, échange avec le pays occitan...

LANN VRAZ

D'ar Yaou 10 a viz Here e oa bet ar re 4e hag ar re 3de e sinema "ar waremm" e welet Lann vraz, ar film hir kentañ e brezhoneg, aozet gant Soazig Danielou..

Les quatrièmes et troisièmes du collège ont vu le premier film long métrage en breton : « Lann Vraz ».

SINEMA !!!

D'ar Yaou 14 a viz Kalan-goañv e oa bet ar re 6vet ha 5vet e sinema « La Garenne » e sellet doc'h ar film « Broken Arrow » ur film graet e 1950.

Get « Collège au cinéma » e oa bet kenniget an abadenn. Bep blez e kemer perzh Skolaj Diwan ar Morbihan er raktres à un dro get ar Ministrerezh ar Sevenadur hag Ministrerezh an Deskadurezh. Bep trimiziad eh aomp da sellet doc'h ur film. Ul labour a-ziàr ar filmoù a vez graet goude, get sikour un teuliad pedagogel.

CINEMA !!!

Le jeudi 14 novembre, les élèves de 6ème et 5ème sont allés au cinéma « La Garenne » voir le film « Broken arrow » de 1950. C'est dans le cadre du dispositif « Collège au cinéma » que nous avons organisé cette sortie.

Comme chaque année, le collège s'est inscrit à cette action culturelle en partenariat avec le Centre National du Cinéma, le Ministère de la Culture et le Ministère de l'Education nationale. Un film est proposé chaque trimestre. Chaque film est ensuite exploité en classe avec l'aide d'un dossier pédagogique dédié.



OKITANIA

Ar re 6vet hag ar re 5vet a oa chomet er skolaj evit eskemm gant 2 baotr eus Okitania diwar-benn an dansoù, ar sonerezh, istor ar vro... Kement-mañ evit reiñ lañs d'ur raktres a-zivout Okitania & Breizh hag a dalvezo d'ar skolajidi ober anaoudegezh gant ur vro hag ur sevenadur all, disheñvel hag heñvel ouzh o hini.

Pendant ce temps, les sixièmes et les cinquièmes ont échangé avec deux occitans au sujet de la danse, de la musique, de l'histoire du pays... Cette rencontre s'inscrit dans le cadre d'un projet Bretagne-Béarn (projet pluri-disciplinaire en histoire des arts) qui permettra aux élèves de découvrir un pays et sa culture, différent du leur.

DA ZONT... – À venir...

* Emvod-prezegenn gant Mediacap hag ar skolajidi, a-zivout dañjerioù Internet (c'hoarioù, riskloù, diàrbenn...) D'al Lun 2/12 gant ar 6vet hag ar 5vet ; d'al Lun 9/12 gant ar re 4re hag ar re 3de.

* Yaou 14/11 : Skolaj er sinema ("La flèche brisée", e Saozneg) evit 6vet hag ar re 5vet.

* Conférence-débat avec Mediacap et les élèves, au sujet des dangers d'Internet (jeux, risques...). Le lundi 2/12 avec les 6èmes et les 5èmes ; Le lundi 9/12 avec les 4èmes et les 3èmes.

* Yaou 14/11 : Collège au cinéma ("La flèche brisée", en anglais) pour les 6èmes et les cinquièmes.